

AR VUHEZ KRISTEN



ADMINISTRATION

13, Place Alsace-Lorraine
LORIENT



C/C. POSTAL n^o 209-84

SUR
NANTES

Koumanantchou

An holl goumanantchou a gomans e miz Genver. — Skriva an hanoioù hag an adress fraez ha penn-da-benn ; ma n'eus bureo post ebet er gomun, lakat gant pehini e vez graet.

Koumanant ordinal : **6 l.** ar bloaz.

Koumanant a enor : **10 l.** ar bloaz, gant perz e 365 OFERENN (unan bemdez) a vez lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.

N.-B. — Hol lennerien, m'o deus c'hoant, a c'hell dreizo o-unan rei frouez an oferennoù-se d'o zud varo.

Adkoumanantchou

An neb a vez echu e goumanant, a vez kaset d'ezan dre ar post eur « MANDAT-CARTE », evit ma c'hellou koumananti a-nevez. —

Ni a gont war bolontez vat hol lennerien evit paca raktal.

An neb n'en devo ket paet **TRI MIZ GOUDE**, ne resevo mui ar gelaouenn.

TAOLIT EVEZ : lavarit atao petra 'zigasit d'eomp : **EUN ADKOUMANANT** pe **EUR C'HOUMANANT NEVEZ** ; ma tigasit asamblez adkoumanantchou ha koumanantchou nevez, **DISPARTIA MAT ANEZO**. — Evit eun adkoumanant, rei d'eomp an adress eun **EVEL MA OA WAR AN NIVERENN DIWEZA...** ha ma'z eo ret, goulenn da-c'houde chanj anezi.

Chanj adress

Evit chanj adress, digas d'eomp 4 real e timbrjou gant an adress evel ma oa war an niverenn diweza.

Liziri ha skridou

An holl liziri a dle beza kaset da :

Administration de « Ar Vuhez Kristen »,

13. place Alsace-Lorraine, Lorient (Morbihan)

C.-C. 209-81, Nantes.

N.-B. — Ar gelaouenn-man a zo moulet ivez e galleg ; rak-se ar re o defe c'hoant da gaout an hini c'hallek e-lec'h an hini vrezonek, n'o defe nemet skriva d'eomp, hag e vefe kaset d'ezo *La Vie Chrétienne e-lec'h Ar Vuhez Kristen*

Komzou ar wirionez.

Parabolenn an Hader

Jezuz en em blije o komz d'ar bobl dre barabolennou, da lavaret eo, o tisplega d'ezan traou an nenv, ar c'haera gwirioneziou dindan henvedigeziou tennet eus traou an douar, evit ma vijent gwelloc'h komprenet gantan.

Eun dervez eta ma oa eur bern tud dastumet en dro d'ezan e Kafarnaum. Jezuz a yeas er meaz eus an ti betek lenn Jenezared evit prezeg d'ezo. Met, evel ma kreske an dud muioc'h mui, setu hor Salver o pignat en eur vag, hag ac'hano, azezet en eur penn anezi, e kendalc'he da gomz d'ar bobl bodet en aod. Displega a reas d'ezo, da genta, parabolenn an hader.

« Selaouit, emezan; eun den a yeas d'ar park evit hada. Epad ma hade, lod 'eus ar greun a gouezas hed a hed an hent, hag a voe flastret dindan an treid ha debret gant laboused an nenv. Eul lo-



Eun den a yeas d'ar park evit hada...

denn all a gouezas en eul lec'h meinek ha n'en doa ket kalz a zouar, hag a ziuanas kerkent rak an douar n'en doa ket a fount. Met pa zeuas an heol bero e voent suilhet ha dizec'het, dre ma n'o doa ket gallet ober gwiriziou, lod all a gouezas e mesk ar spenn hag ar spenn, o kreski ganto, a vougas anezo; eul lodenn all koulskoude a gouezas en douar mat ha goude beza savet ha kresket a zougas frouez, lod tregont, lod tri ugent ha lod kant evit unan. »

Hag en eur echui da gomz evelse, Jezuz a lavare a vouez uhel : « Ra glevo an neb en deus diousskouarn da glevet ! » Pa chomas e-unan gant e zaouek abostol, ar re-man a c'houlennas digantan perak e komze d'ar bobl dre barabolennou. Hen a respontas ne dalveze ket ar boan komz skleroc'h d'an dud a oa ouz e selaou rak ma raent skouarn vouzar d'e brezegennou : aon o doa da veza gounezet ha da veza konvertiset. Met an Ebestel, int, a oa tud a volontez vat. Setu perak e fellas da Jezuz displega skleroc'h dirazo ar c'homzou en doa lavaret :

« An had, emezan, eo komzou Doue. An hader eo an neb o had dre e brezegennou. Ar re a reseo an had kouezet hed a hed an hent, eo an dud a glask komzou Doue, met heb o c'hompren. P'o deus o c'hlevet, Satan a ya kerkent hag a skrab eus o c'halonou ar c'homprou a oa bet hadet enno, gant aon na gredfent ha na vefent salvet. Ar re a reseo an had e douar meinek eo an dud a glev komzou Doue hag o c'hemer gant levenez. Met an had ne ra ket gwiriziu enno, ha ne gredont nemet eur pennad amzer; pa zeu d'ezo eur boan pe eun drubuilh bennak, e fallgalonont hag ez eont kuit. Ar re a reseo an had e mesk ar spern eo ar re o deus digemeret mat komzou Doue; met nec'hamanchou ar bed, tromplerez madou an douar, plijaduriou ar vuhez ha pep seurt ioulou fall a zeu da vouga an had, ha ne vez ket a frouez.

Ar re a reseo an had en douar mat eo ar re a selaou komzou Doue, o c'hompren, o dalc'h hag o mag en eur galon vat ha dire-bech, hag a ra d'ezo gant pasianted dougen frouez, lod tregont, lod triugent ha lod all kant evit unan. »

Evit pep hini ac'hanomp, eo en deus Jezuz lavaret ar barabolenn-se. Komzou Doue a zo eun hadenn taolet e pepini eus hon eneo, eun hadenn eus ar vuhez eternel. Piu eo a daol an had-sé. Doue eo an hader kenta. Rak goude m'en deus krouet ar bed, Doue en deus komzet d'an dud evit rei d'ezo da anaout e volontez santel Goude beza komzet d'ar batriarched ha d'ar brofeted, komzet en deus d'an dud dre e vab Jezuz, Doue eveltan. Ha war e lerc'h, Jezuz en deus laket e Ebestel hag an dud a Iliz da hada, en e lec'h hag eus e berz, komzou Doue. Dre o frezegennou eta, ar Pab, an Eskibien hag ar Veleien a daol e kalon an dud hadenn ar vuhez eternel.

Met an holl dud ne zigemeront ket er memes feson an hadenn-se. Lod he reseo hep bolontez vat ebet; n'ez eont ket da selaou ar prezegennou, pe o selaou a reont hep resped, pe memes en em sevel a reont eneb d'ar pez a glevont. Evit ar re-se, skler eo, ne c'hell ket hadenn ar wirionez dougenn en o eneo frouez ebet evit ar vuhez éternel.

Lod all a selaou komzou Doue hep kalon fall. Selaou a reont, ma karit, met ankounac'haat a reont ken buhan ar pez o deus kle- vet, ha ne gemeront poan ebet d'o derc'hel en o sonj; henvel int ouz eun tamm douar leun a vein, E buhez tud eus ar seurt-se, komzou Doue ne zougont ket frouez kennebeut rak ne c'hellont ket gwirizienna.

Bez 'ez eus re all hag a resev komzou Doue, met gant eur spere-d hag eur galon gounezet gant traou an douar. Eman o holl sonjou, o holl soursi gant an danvez pe an enoriou pe c'hoaz gant braoigou ha plijaduriou ar bed. Ar sonjou-se petra int ken nemet drein ha spern hag a voug er galon hadenn ar vuhez eternel ?

Piu eo eta, ar re a selaou evel m'eo dleet komzou Doue ? Piu a resev en o c'halonou evel en douar mat, hadenn ar vuhez eternel ? A re-se eo an dud a laka o brasa soursi d'ober o silvidigez hag a lez an traou all a gostez. Kalon an dud-se a zo eun

douar mat, eur park labouret doun, c'houennet piz eus al louzeier fall. Komzou Doue a gouez hag a ra gwiriziu e kalonou ar seurt tud-se C'houi a velo o vleunia en eneo-se ar c'haera bokedou : boked ar basianted, boked an devosion dener e kenvér Jezuz ha Mari.

Met ouspenn a zo : komzou Doue a zoug er c'halonou-se frouez a bep seurt, da lavaret eo, pep seurt oberou mat. Lod a zoug muioc'h, lod all nebeutoch a frouez; pepini hervez ar frouez en do douget a resevo ivez digant an otrou Doue eur rekompanz vrasoc'h pe vihanoc'h.

En baradoz, hervez m'en deus lavaret Jezuz, ez eus meur a blas : lod a zo izeloc'h eget ar re all. E pepini eus al lec'hio-se uhel pe izel, e zo gwelet ha karet Doue da viken; ha kement hini en do douget frouez, da laravet eo, graet ar mad war an douar, ne vern e pelec'h e vo laket er baradoz, en em gavo ken eurus ma n'en do mui netra da c'hoantaat. Sonjomp ervat e kement-se, re sevomp bepred en hor c'halonou, evel en eun douar mat, ar c'homzou a vez lavaret deomp a-berz an Otrou Doue hag a zo, e gwirionez, komzou Doue, hadenn ar vuhez eternel.

AR BRINSEZ ASTRID



Souezet e voe ar bed, d'ar sul 18 a viz C'houevrer 1934, pa glevas ar c'helou mantrus : *lazet ar roue Albert I*. Souezet eo bet a-nevez, pa glevas, triouec'h miz goude an hevelep kelou : *lazet ar rouanez Astrid*. Hor mignoned eus ar Belgia o doa leñvet ar Roue-Soudard; o daélou a zo bet ken c'houero all evit ar rouanez yaouank, skouer, an holl ha madoberourez he fobl.

Ganet d'ar 17 a viz Du 1905 ar brinsez Astrid a oa nizez da roue ar Sued.

He hano a zenifi : « *donezon an Neñv, gened ha Doue* ». He c'herent o doa kollet kalz euso arc'hant, hag ar brinsez yaouank a voe savet evel ar merc'hed all. Hep c'hoant-uhelaat,

ne glaske beza nemet eus vaouez onest hag oberiant, eur pried hag eur vamm leun a garantez evit he gwaz hag he bugale. He flijadur a oa gwiska tavañcher gwenn ar c'hlañv-diourezed evit ober wardro ar vugale vihan.

D'an oad a ugent vloaz e timezas d'ar prins Leopold. Eur ger a lavaras neuze, eur ger hag a zesk d'eomp pegen uhel oa he skiant : « *Mamm, ha gouest e vezin da veza rouanez ?* » Ia, rouanez a vezo, rouanez dous ha mat ouz an holl, gwir rouanez evit he fobl, gwir vamm evit he bugale.

Ar brinsez a voe savet e relijion ar Brotestanted. Met pevar bloaz warlerc'h he eured, goude beza studiet, pedet, ha goulennet ali tud gouziek, e trôas kein da relijion he zud evit heuilh ar relijion gatolik.

Leun a zoujañs evit he fried, he flijadur a oa beza en e gichenn. Alies etre an dud pinvidik an dimezi ne vez nemet eun dimezi a arc'hant ha nann a galon. Ne voe ket evelse evit ar prins Leopold hag ar brinsez Astrid. O daou en em garent gant eur garantez dinamm ha birvidik. Warlerc'h ar gwall-daol a goustas he buhez d'ezi, ar roue ne gavas nemet eur gomz : « *Kollet em eus pep tra* ». Kaëra meuleudi evit eur pried !

Eur verc'h ha daou baotrik a laosk war he lerc'h. Morse mamm ne voe enni muioc'h a foug gant he bugale, morse mamm ne evezias kement outo. He-unan e falvezas d'ezi maga anezo, ha ne gave ket al labour a zo ret ober wardro ar re vihan na re skuizus na re izel evit eur rouanez. Ganto e yae da bourmenn, ha ne oa neuze kemm ebet etrezi hag ar mammou all.

Eun dervez e kavas evelse eur paotrig o leñva en e garr-bihan. Leun a druez outan, e tivailhuras anezan evit klask perak e leñve : eur spilhenn disoñjet gant ar vagerez. D'ar vamm a c'houlenne diganti he hano, e rôas ar respont-man : « *Va hano ne lavarfe d'eoc'h netra. Va micher eo... beza mamm.* »

Er Suiss eur bugel a c'houlennas outi : « *Petra eo eur rouanez ?* » — « *Eur rouanez, emezi, a zo eur vamm he deus bugale d'ezi, met a zo ivez mamm da eleiz a vugale all eus he bro.* »

E youl a oa kaout eur gurunenn gaër a vugale endro d'ezi, hag an hevelep mennoz a rae evit ar mammou all.

O tadou ha mammou eürus gant ho pugale, karit anezo, savit anezo hervez lezennoù Doue, ha taolit evez war o iec'hed, war o c'hoariou, war o deskadurez, ha war o ene.

TAD BRIEG.

Lezit ar vugale...

An deskadurez a zo eun dra ret en hon amzer. Setu ma kaser ar c'hrouadur d'ar skol an abreta ma c'heller. Plijadur am eus o welout paotred ha paotrezed o tont a-vandennou, drant ha seder, o bouteier nevez o pigosal stank war an hent bras. Ha koulskoude e vezan trist, trist, pa sonjan da beseurt skol ez eont; pa sonjan er parrezioù n'eus nemet skolioù dizoue enno.



Ar skol dizoue a zo eur bleiz kriz prest da lonka hor bugale.

Setu aze bugale hag a zo da Zoue ha d'an Iliz dre o badiziant. O daoulagad zo skler evel eur mellezour, o ene glan ha yac'h. Evel plant yaouank, ne c'houlennont nemet kreski e gras Doue evit dougen bleunioù kaer ha frouez puilh a vertuzioù kristen. Hag ez eont d'ar skol laik !

Bloavezioù zo eman an traou evelse, ha ni katoliked a zeu d'en em voaza, da sonjal e tle beza an traou evelse. Fazio a reomp, ha fazia bras. Ne dlefemp ket kousket dizoursi keit ha ma ne vo ket er Frans skolioù hervez hor relijion. « *Keleñnadurez kristen, d'an holl vugale gristen, e skolioù kristen* », setu ar pezh a c'houlenn an urz vat. Anez n'eus ket a justis, hag hor c'houstians a dle beza en arvar. Perak ?

Da genta abalamour ar skol dizoue a c'hell ober droug

bras da ene ar vugale. Pet skolaer a zo a c'hellfer kaout fizians enno penn-da-benn ! Ne lavarant ket e vijent hep ehan o tiskar ar feiz. Met pa ne lavarant nemet eur ger goapaus eur wech ar mare, kement-se zo tra awalc'h evit ober droug bras : d'an oad-se, ar bugel zo kizidik e galon.

Gwelit an dismantr a ra eun taol avel fall hepken war frouez nevez furnet. — Ha pa ne lavarfe netra ar skolacrien, peogwir ne zeont wardro iliz ebet, e roont skouer fall d'ar c'hrouadur. « *Sell 'ta, a sonjo, an Aotrou ne vez ket en oferenn. N'en deus ket ezomm da bedi ?* »

Ouspenn-se, pet gwech n'em eus ket klevet ar gerent o klemm abalamour ma ne veze ket beilhet awalac'h war o bugale er-maez eus ar c'hlas. Ne sonjer ket e vezont douget d'an droug ken abred ha ma vezont, diwar goust ar pec'hed orijinel. Daoust hag ar sklolaer difeiz a ra fors ouz ar pec'hed orijinel ?

D'an eil, ar skol dizoue, ha pa ne rafe ket a zroug, ne ray ket ivez ar vad a ra eur skol gristen. Gwelit ar c'hemm a zo etre eur bugel a ra eur bloaz hepken er skol gristen goude beza bet er skol laik !

Setu perak e vezan daoniet pa welan bugale hep difenn o vont d'ar vistri, difeiz. An tadou hag ar mammou sklerijennet mat a sonj evel don. N'ema ket eeun an traou. Kerent kristen, digorit ho taoulagad. Gwir ho peus da gelenn ho pugale hervez ho kredennou. Nac'het eo ar gwir-se ouzoc'h. Ret eo d'eoc'h marteze lakaat anezo e skoliou dizoue. Neuze arabat d'eoc'h kaout fizians. Bezit war evez ! Ha kenta ma c'helloc'h tennit anezo ac'hano. Selaouit komz Hor Zalver : « *Lezit ar vugale da zont davedon, ha ne virit ket outo da zont.* »

DEVY.

Torfetourien !!!

« *An tadou hag ar mammou a wir ouz unan pe unan ouz o bugale d'en em rei da Zoue a zo torfetourien.* »

Ar vadiziant a zigor ar baradoz

E Lizeri misionou ar Fransiskaned e Natal, e lennomp an istor-man :

« Eun den, war an hent da veza kristen, a zo kouezet klanv en eun taol ha gwaall glanv zoken. Eman o vont da vervel. Ar gristenien, daoulinet endro d'ezan, a bed kalonek, da c'headal ma teuo ar beleg.

Ha setu ar c'hlanvour digeri e zaoulagad ha diskleria : « Emaoun pare, emoun pare ! » Ar re holl a zo eno a zo spontet da genta ha da c'houde leun a joa. Hag abenn eun nebeut amzer, ar c'hlanvour konta d'ezo e istor.

« Santout a raen, enezan, ar maro o tont hag e voen douget en eun islonk ken doun, ken du, ma voen spontet ; edon o vont da goll pep fizians, pa voen raktal dibradet ha douget beteg an nenv. Eno e welis Doue Hollc'halloudek azezet war eun tron aour, gant e zremm skedus evel an heol. Endro d'ezan ez oa Leanezed eus ar mision gwisket e gwenn. Karet em bije beza digemeret en o zouez, met Doue a zavas e vouez da lavaret d'in :

« Ret eo d'eoc'h diskenn war an douar evit beza graet kristen, ha da zul ez eot d'an iliz d'an oferenn. »

Petra oa ? Eun hunvre ? Eur barrad terzienn ? Eun taol eus madelez Doue ? N'ouzomp ket. Ar pezh a zo sur, ar c'hlanvour a oa pare mat, hag ouspenn, e nerz-kalon a oa kresket en eun doare souezus. En em lakat a reas da bedi gant ar re a oa, eveltan, war c'head eus ar vadiziant, hag e trugarekae Doue eus ar grasou en doa bet.

Antronoz, kerkent ha goulou deiz, ez eas da Skolsburg da gerc'hat e levr-katekiz, ha daoust d'an hent hir en doa graet, n'oa ket skuiz, hag e sikouras c'hoaz e c'hwreg da zic'hwrienna gwez en eun tamm-douar edont o freuza.

En dervez-se ar visionerien a en em gavas e Kaba evit ober katekiz. En hent o doa klevet lavaret oa maro Kohama.

— Maro hep beza resevet ar vadiziant !

— Ya maro eo bet, met resusitet eo. E buhez eman, e buhez eman, a lavaras an dud.


Hag o tigouezout er geriadenn, e weljont an hini « resusitet ». Kohama e-unan, o tont d'o diambroug.

— « Tadou, emezan, me a zo bet en Nenv ; gwelet am eus eno leanezed diniver. »

Kohama a resevas ar Vadiziant hag a zo, abaoe, eur c'hristen eus ar re wella.

PER.

GANT PESKETAERIEN TERRE-NEUVE



*Al lestr m'ema warnan an Tad Yvon, aluzenner
Pesquetaerien Terre-Neuve.*

Gant Pesquetaerien Terre-Neuve



*An Ao. 'n Eskob o venniga bag an
Tad Yvon*



*Kurusted bihan skol an Tadou Kapusin
e Dinard, o kana war al lestr.*

Evit beva salvet eo ret anaout ha kredi.

Mister an Eternite

POANIOU AR RE ZAONET (kendalc'h)

Ya, dalc'hmat e pado an disparti-se eus ar Sent, evel m'hel lavar J. K. e-unan en Aviel, o komz eus an den fall pinvidik hag eus Lazar, ar paourkaez disprijet gant an den pinvidik.

« Ha setu deuet an deiz, eme Jezuz, ma varvas Lazar : an Aelez e zougas d'an Nenv da veva eurus gant Abraham.

« Mervel a reas ivez ar pinvidik hag hen a gouezas en ifern.

« Eus e brizon ma oa enni gwasket ha kastizet, e savas e zaou-lagad hag e teuas d'ezan gwelout, pell pell duhont, Abraham, ha, gantan, Lazar eurus.

Hag hen sevel e vouez da lavarout d'ezan : Tad Abraham kemer truez ouzin ha degas d'in Lazar ma tistano poan leskus va zeod gant penn e viz soubet en dour, rak gouzanv spontus a ran en tan-man.

« Hag Abraham a respontas d'ezan : Va mab, dalc'h sonj ac'h eus bet madou ha levezeg war an douar, ha Lazar poaniou ha paourentez. Brema eman digollet ganen, ha te ac'h eus ar boan. Ouspenn-se ez eus etrezomp-ni evit atao eun torr-gouzoug digor, bras, doun ha ledan. — Rak-se ar re a garfe mont ac'han d'ho kaout-c'houi, du-ze, ne c'hellfent ket hen ober; hag ar re a zuze a garfe dont aman n'her gellfent ket muioc'h.

— « Met, Tad Abraham, kasit neuze Lazar da di va Zad, rak pemp breur am eus c'hoaz, evit lavarout d'ezo diwal da goueza el lec'h-man a dourmantou.

— « Bez 'o deus Moizez hag al Lezenn : n'o deus d'ober nemet o selaou.

— « Nann, Tad Abraham, met, pa glevfent unan maro, int a rafe pinijenn.

— « Ma ne selaouont ket Moizez hag ar brofeded, hag e klevfent unan maro, ne gredint ket muioc'h. »

An istor-se, kontet gant Jezuz-Krist, a ziskouez petra eo unan daonet, pere eo e sonjou, e boaniou. Met ar pez a zo lavaret eus unan, a c'hell, emichans, beza lavaret eus an holl. Rak-se e c'heller kredi :

1) Evit atao e vo dispartiet ar re zaonet eus ar sent ha ne vo mui a zarempred etrezo : « Etrezomp, eme Abraham, ez eus eun islonk hep strad ne c'hell den treuzi evit mont eus eun tu d'egile. »

2) Kement-se, koulskoude, ne vir ket, eus ar re zaonet da sonjal er re a vev c'hoaz war an douar. Eleac'h klask o zenna ganto d'an ifern, evel m'her gweler e meur a levr diavis, e klaskont kentoc'h mirout outo da goueza eno : « Kasit Lazar da di va zad evit lavarout d'am breudeur chanj buhez evit diwall da goueza aman. »

3) Sonjal a ra ivez ar re zaonet, er re a zo er Baradoz, p'eo gwir e c'houlennont skoazell diganto : « Digasit d'in Lazar, ma

— 1219 —

tistano poan leskus va zeod gant e viz glebiet en dour. » Met siouaz ! n'o selaouer ket ha birviken ne vo graet. — Ha setu trede poan ar re zaonet.

**

Pedervet poan ar re zaonet. — Eun droug poanius a ziavaez d'ezo, hanvet Tan.

An tri boan kenta a oa diwarbenn ar poaniou a-ziabarz : poaniou a spered, poaniou a galon ha poaniou garo ken gwaskus ha ken kalet ma ne c'hell den kompren.

Ar bedervet poan a zo eun droug bras hag a wash ar re zaonet eus a ziavaez. En Aviel eo hanvet Tan.

« Kerzit d'an Tan peurbadus », a vo lavaret d'ar varn ziweza.

« Gouzanv a ran er flamm-man.. en tan-man », a lavar an den pinvidik doanet..

Met, petra eo an tan-se ha pe natur en deus ? Ne ouezer ket. An doktored zoken n'int ket gouiziekok'h eget ar re all.

Sur awalch n'eo ket eun tan henvel ouz an hini a anavezomp war an douar; graet gant koad, glaou ha kant tra all. N'eus ket eus an traou-se en ifern.

Sant Aogustin, o komz anezan, a lavar eo eun tan speredel, evel eur spered : « Rak, emezan, evel ma tle beza eternal ret eo ma ve speredel an tan-se, » *ignis spiritualis*.

Met, a hent-all, e lavar : « Ne gredan ket e ve den war an douar o c'houzout petra eo tan an ifern. »

Ne dalv ket ar boan eta klask pelloc'h. N'ankounac'haomp morse eo eun droug bras ar bedervet poan hanvet Tan.

Ha kredomp, o veza m'eo Jezuz-Krist e-unan eo en deus roet d'ar boan-se an ano a dan.. hag eta e tle beza eun droug spontus.

MELEGAN.

Sonjit eun tammig

Gwelet e vez bemdez Framasoned oc'h en em ober katolik wao o gwele avaro.

Ar c'hontrol n'eo bet gwelet biskoaz.



Pa zigoront o daoulagad

Ne ket eus ar vugale e konzan, met eus an dud a zo enep an Iliz.

Pa ne serront ket o daoulagad, evit mirout da welout an traou evel m'emaint, e teuont da anzav n'heller,

Graet ez eus bet, er bloaz-mañ, eun tamm gouel ben-nak, e Pariz, abalamour m'ez eus hanter-kant vloaz abaoe m'eo marvet ar skrivagner brudet, Victor Hugo. Hen-mañ a oa, el lodenn diveza eus e vuhez, enebour touet an Iliz.

Setu amañ koulskoude ar pezh a zisplege en eur brezegenn a reas, dirag kannaded ar vro, d'ar 15 a viz Genver 1850 :

« Unan eus gwalleuriou hon amzer, hag e hellfen lavarout n'ez eus gwalleur ebet nemetañ, eo ar gredenn n'ez eus evit an den nemet ar vuhez-mañ ha netra ken en tu all d'ar maro.

« Da betra dalvez ar gredenn-se ? Da lakaat ar re a

etouez an dud, kaout eürusted, peoc'h gwirion, nerz-kalon, nemet dre ar relijion. Ha dastumet am eus, amañ hag ahont, komzou eun nebeudadig anezo.

Victor Hugo.

zo er boan da gaout pounneroc'h o samm, ha da goueza en dizesper, evel an dud daonet.

« Me a fell d'in, gwir eo, gwellaat, er vuhez-mañ, stad ar re a zo er boan, met gouzout mat a ran ar c'henta tra d'ober evit kement-se eo rei d'ezo esperanz... Na zi-zoñjomp morse, ha deskomp kement-mañ d'an holl : ne dalvezfe ket ar boan beva, ma vije ret d'eomp mervel korf hag ene.

« Ar pezh a skañva al labour, ar pezh a laka an den da veza mat, fur, madelezus, just, eo gwelout dirazañ bepred eur bed gwelloc'h, eur vuhez eürusoc'h, o teuler sklerijenn a-dreuz tenvalijenn ar vuhez-man. »

An Aotrou Flandin.

An ao. P. E. Flandin, bet ministr-bras en hor bro, a voe, arlene, kaset gant ar gouarnamant d'ar C'hanada, evit ar goueliou kaer a voe

lidet eno en enor da Jakez Cartier, hag a lavaras, en eur brezegenn :

« Pa voe tennet ar vroman digant Bro-C'hall, pe-

seurt nerz 'ta a oa en dek mil den a jomas er C'hanada, hag o lakeas da c'houzañv ar yenijen, an naon, ar c'hleñved, an emgannou enep ar gouezidi ha, siouaz ! enep an dud gwenn, o breudeur, ha da lezel koulskoude war o lerc'h eur ouenn-dud a welomp hizio c'hoaz, goude bep seurt trubuilhou, o vleunia, kreñvoc'h eget biskoaz ?

« Ret eo d'eomp anzav, evit lavarout ar wirionez, e oa nerz ar feiz kristen...

« Pa welent e oant dilezet gant peb tra ha gant an holl, int a gendalc'he da vaga, e-bars o c'halon, ar flamm

a roe d'ezo sklerijenn diwarbenn ar gefridi o doa d'ober er bed-man : labourat evit Doue. Ne felle d'ezo koll nag o relijion, lezet d'ezo gant o zud, na kennebeut, o yez, a gasent drezi o fedennou wardu Doue. »

Ao. Flandin, m'he deus bet gwechall ar bedenn hag ar relijion ker bras galloud evit rei nerz-kalon da Gandaiz, perak, hizio, n'ez int, evit ar framasouned, hag awechou evidoc'h d'o heul, nemet traou divalo, gouest hepken d'obér droug d'ar vro ?

An Aotrou Herriot.

An ao. Herriot, an hini a glaskas, dek vloaz 'zo, ober a-nevez brezel da gatoliked Frañs, a skrive, n'eus ket pell c'hoaz :

« Na labour ar bolitikerien, nag hini ar re a zo e penn ar broiou, ne zo gouest, drezo o-unañ, da lakaat ar boblou d'en em glevout mat.

Klask barnerien da gompesa an traou, pa zav trouz etre ar boblou, a zo eun dra vat. Met ret eo, muioc'h c'hoaz, cheñch spered ha kalon an dud, o prezeg d'ezo eun Aviel nevez, pe oc'h ober d'ezo senti e gwirionez ouz an Aviel koz. »

*

**

Kredit mat, ao. Herriot : senti ouz an Aviel koz a zo trawalc'h. Met piou tamall, ma'za ker fall an traou, nemet oc'h c'houi, hag ho ken-

seurted, ha n'hellit ket sevel eun Aviel nevez, ha ne fell ket d'eoc'h heuilh kenteliou ha lezennou an Aviel koz ?

KEON.

Miz Du, miz an Anaon

« Breudeur, kerent ha mignoned,
En han' Doue hor selaouet ! »



An dud veo hepken a c'hell digeri dor ar Baradoz da
eneou paour ar Purgator.

N'ho lezomp ket da leski en tan, pell diouz an Aotrou
Doue.

Kouezomp d'an daoulin ha pedomp evito ! !

Mac'harit an Dour Benniget

— Chê, na pebez hano ! Biskoaz kement all ! E pelec'h ar
varn eo bet ar vaouez kêz-se o pesketa eun hano evel hennez ?

— O ! n'he deus ket bet ezomm da vont da bell. Selaouit kentoc'h...

Mac'harit a zo hirio eur vaouezig aet braoik dija war an oad,
krog eo en he zri-ugent vloaz. Eman dija daoubleget war he fenn-
baz ha... war he bez. Ne gollin ket d'ezhi he « fortun » o lavaret
n'eo ket ar goanta eus merc'hed ar barrez. Ridet eo he faz, mele-
net gant an amzer ; daou lagadig pikouzet a zo en he fenn hag eur fri
toughn e kreiz he faz, eur fri a dremen dreizan meur a c'harigellad
butun bep bloaz...

Bep sul e kavot Mac'harit en iliz, hag atao e vez eno unan eus
ar re genta... daoulinet pe azezet war eun tamm kador doull ken
koz egeti d'an nebeuta. Atao e vez en henvelep lec'h e kichen
pinsin an dour benniget. Setu perak he hano farzus.

**

Pell arak ar pevare son Mac'harit a vez eno o pedi pe da vihana
oc'h ober an neuz da bedi. Drailha a ra pedennou hir met e spe-
red n'eman ket o pedi.

Kement den a zeu en iliz a vez sellet outan eus ar penn betek
an troad. Ar yaouankiziu dreist-holl a vez luchet outo a-gorn ; ha
Mac'harit, daoust d'he oad, a oar petra ' wel hag ar zizun a-bez
a vo a-vec'h hir awalc'h evit konta ar pezh he devez gwelet, ha zo-
ken ar pezh n'he devez ket gwelet da gement komaer, da gement
strakell ha da gement klakenn a zo er vro, hag er vro-se n'int ket
rouez, kredit ac'hanoun.

— Gwelet az peus, Marjan, eme Vac'harit, mab Per an Drom-
pilh o tont en iliz disul ; pebez taol rodal en deus distaget beteg
ar balustrou ; ne oar mui lakaat e c'hlin d'an douar, ne ra mui
nemet eur skrabadennig yar... gant aon moarvat da freuza ar pleg
a zo en e vragou ledan...

Ha Laouik ar C'haz Koad, n'az peus ket e welet, gant e vou-
tou-ler melen, nevez flamm ha gwigour ganto... N'edo ket abred o
tigouezout en iliz ; chomet en ostaleri sklaer eo...

Ha merc'h Fench an Didok ? nag a ruz a oa ouz he muzellou,
nag a vleud ouz e diouchod... setu aze eur ganfartez ha ne vo ket
buhant mouget gant he relijion...

Ha Soazig an Durzunel 'ta ; pegen rinklik oa he c'hoef ganti ha
pegen difoupet he bleo. O vont da fortuna eman, war a glevan,
gant eur martolod n'en deus na feiz na reiz, eul lanfre hag eur
mesvier, unan diouz he doare, na petra 'ta.

— Chê, Marjan, na fall eo an dud en dervez hirio ! Na pegen
skanv penn ar yaouankizou !, a lavar Mac'harit oc'h ober daoulagad
gwenn hag o sevel anezo warzu an nenv, evel ar yer pa vezont
oc'h eva dour.

Ha Mac'harit a ya pelloc'h hag a gendalc'h da choakat, da zraihha, da ribinsat ha da zispenn brud vat e nesa. Eun taolig dant aman, eun taolig teod du-hont ha pep hini a baka e begementig. Rouez eo ar parrezioù ne gaver ket enno eur c'hoar, eur verc'h pe da vihana eun nizez bennak da Vac'harit an Doue Benniget. Tud direbech ha tud a relijion eo ar seurt tud-se war o meno, tud, ha ma kredfent a lakfe ar sent da ziskenn diwar an aoterioù evit kemerout o flas.

Souba a reont o bizied en dour benniget betek o ilin koulz lavaret; da genta e vezont o vont en iliz, da ziweza o tont er maez; pa vezont o pedi e lakont o fenn var e gostez ken ha bakont eur penngamm (*torticolis*), bez e vezont en oferenn, er rozera hag er gousperou... Petra 'ta c'helfent ober ouspenn ? Petra ? O, nebeudig a dra, met a zo mat koulskoude derc'hel koun anezan.

Setu aman : kompren da genta eo ret, evit beza e gwirionez tud a relijion, senti ouz Doue a c'hour-c'hemenn deomp « *karout hon nesa evel domp hon unan* »; d'an eil, bep an amzer, lenn an Aviel: eno e kavfent o foltred; « *c'houi a wel an tammig kolo e lagad ho nesa ha ne welit ket an treuset en hoc'h hini* ». « *Henvel oc'h ouz ar beziou, en diavaez ez int kempennet kaer, en diabarz n'ez eus nemet breinadurez.* »

Mac'harit an dour benniget hag he mignoned eo brasa enebou-rien ar relijion a zo en eur barrez, rak lakaat a reont an disme-gans da goueza war ar relijion. Ne reont ket marteze « *freuz ha reuz* », nann. Met henvel int ouz ar mel-c'hoed, dre ma 'z eont e lezont glaourenn lous ha spegus.. kailhara a reont pep tra ha pep den...

Ar mel-c'hoed, gouzout a rit, a vez debret gant an tousegi.
Diouallit Mac'harit. PETROMIK.



Oc'h ober katekiz d'ar baganed vihan.

Mision Font ar Veuzenn, Gverec'h 1935



Ar vugaligoù a zougas binvioù ar Basion




Ar baotred yaouank war loan e penn ar prosesion.



Ar c'hanerezed



Ar gwazed o tougen eur C'hrist eus ar gaera, roet da Bont ar Veuzenn gant Ao. Person Sant Segal.



Eul levr nevez

TREC'H AR GARANTEZ

Romant

gant

Brogarour.

(Editions d'Arvòr, 13, Place du Centre)

Guingamp.



SELAOUIT MAT !

Er miz a zeu e kavot er Vuhez kristen
poltrejou

Mision Sant - Woazeg.

